

MUSÉE DE BRETAGNE



Gweladennoù e brezhoneg e mirdi Breizh

Diskouezadeg pad "Hollved eo Beizh"

D'ar Meurzh 26 a-viz Mae da 7^e noz

Breizh eus an eil penn d'egile

Kontañ a ra an diskouezhadeg-mañ, istor Breizh eus ar ragistor betek Breizh bremañ gant 2300 traezenn diskouezet war dammdost 2000m².

Kinnig a ra mirdi Breizh deoc'h ur weladenn, kaset en dro doare ur gaozeadenn ganti, dre ma c'hello ar weladennerien sevel goulennoù pe c'hoazh degas o gouizegezh. An hentad-mañ a zo filmoù berr enni hag ar weladenn vo un digarez da sellout oute e brezhoneg.

D'ar meurzh 16 a-viz Even da 7^e noz

Ar Grennamzer e Breizh: Kristenidigezh ha brezhonekadur an Arvorig ha Breizh an duced

En un doare didrouz-kaer ha diwezhat a-walc'h e voe kristenaet Breizh gant divroadegoù bras eus Breizh-Veur da Arvorig.

Dre ma oa bet eskemmoù en tu all da vor breizh abaoe ar ragistor dija, e oa aes d'ar vretoned en em staliañ e ledenez Arvorig e keit ma oa ar franked o kemer ar galloud e Galia digant an impalaeriezh roman. E 1532 goude daoù vrezel, euredoù Anna Vreizh hag he merc'h Klaoda gant roueed Bro-c'hall, e voe staget Breizh ouzh ar rouantelezh c'hall da vat.





Gweladennoù e galleg e mirdi Breizh

Diskouezadeg pad "Hollved eo Beizh"

D'ar Yaoù 7 a-viz Mae da 6^e noz
Oadvezh Aour Breizh: Eus koulz Anna Vreizh d'ar Bonnedoù ruz

D'ar Yaoù 14 a-viz Mae da 6^e noz
Eus ar Renad-Kozh d'an Dispac'h bras

D'ar Meurzh 19 a-viz Mae da 6^e noz
Arvorig gallian ha roman

d'ar yaoù 4 a-viz Even da 6^e noz
Oadvezh Aour Breizh: Eus koulz Anna Vreizh d'ar Bonnedoù ruz

d'ar Gwener 19 a-viz Even da 6^e noz
Eus ar Renad-Kozh d'an Dispac'h bras

d'ar Yaoù 11 a-viz Even da 6^e noz
Arvorig gallian ha roman

D'ar Meurzh 23 a-viz Even da 6^e noz
Breizh Glas, Gwenn, ruz, etre chom e-giz kozh ha mont war-raok

